

Ar mediaoù hag an demokratelezh

I. Ar frankiz da gomz hag ivez ar frankiz koustiañs eo diazez an demokratelezh.

A. Pennadoù an disklêriadurioù ofisiel

1. « La libre communication des pensées et des opinions est un des droits les plus précieux de l'homme : tout citoyen peut donc **parler, écrire, imprimer librement** ».

Disklêriadur gwirioù mab-den hag ar c'heodadad 1789, mellad 11

2. Considérant que la méconnaissance et le mépris des droits de l'homme ont conduit à des actes de barbarie qui révoltent la conscience de l'humanité et que l'avènement d'un monde où les êtres humains seront **libres de parler et de croire**, libérés de la terreur et de la misère, a été proclamé comme la plus haute aspiration de l'homme... l'Assemblée générale proclame la présente Déclaration universelle des Droits de l'homme comme l'idéal commun à atteindre par tous les peuples et toutes les nations.

Disklêriadur etrevroadel gwirioù mab-den, 1948, raklavar.

3. Tout individu a droit à la liberté **d'opinion et d'expression**, ce qui implique le droit de ne pas être inquiété pour ses opinions et celui de chercher, de recevoir et de **répandre**, sans considérations de frontières, les informations et les idées par quelque moyen d'expression que ce soit.

Disklêriadur hollvedel gwirioù mab-den, 1948, mellad 19.

B. Ar frankiz disklêriñ e veno : ur gwir pennañ.

1. Ar frankiz disklêriñ e veno, elar frankiz koustiañs(relijion,) frankiz embann a vez diazez ar renad demokratel. Liammet eo get ar frankiz ar mediaoù, ar c'heleier, ar radioù, ar genrouedad. Ar gwir titouriñ, ar gwir reseviñ, kas titouroù ha mennozhioù eo diazezoù gwirioù mab-den Pouezus eo ar mediaoù, meur a wech anvet ar « 4vet galloud », ur galloud karget da evezhiñ, da vurutellat ar galloudoù arall(seveniñ, lezenniñ, barnel).

Diazez un demokratelezh eo **liesegezh ar mediaoù** evit kemenn, eskemm, titouriñ.

2. Ar frankiz embann a c'hell bout en arvar pe nagennet.

E-barzh leun a stadoù ne vez ket doujet doc'hti. Edan evezh ar galloudoù strizh relijiel pe politikel eo ar frankiz embann, skriviñ ; An hanter ag an 192 Stad en ABU ne zoujant ket d'ar frankizoù-mañ. En Aljeria ez eus bet 60 kazetenner drouklahzet abaoe 1993.

Dont a ra da vout ur benveg propaganda an titouriñ nann dieub. Emanñ benveg an diktatouriezhioù a-benn skigniñ mennozhioù er c'hazetennoù, traktoù, skritelloù, filmoù, radioù. A-drugarez da deknikoù propaganda ha lod ar bersonnelezh e oa daet da vout trec'h an naziakadur..

II. Ar meno foran hag ar mediaoù.

A. Hiviz-an-deiz ar frankiz disklêriñ e veno hag ar frankiz kaout titouroù evit diazezoù pennañ peogwir e c'hell d'ar geodediz kompren an darvoudoù, sevel o meno, sevel o sav-poent, burutellat.

Er gevredigezh e vez leun a zoeroù a-benn skigniñ hag enrolliñ titouroù a bep seurt é tonet a bep tu ag ar c'hevandirioù: ar c'heleier a-stroll eo. : . Dastumet e veze an titouroù-mañ get ajañsoù-kelaouiñ hag adstummet, labouret get ar mediaoù. Ar re-se a implij a bep seurt doareoù a-benn skigniñ anezhe : radio, kenrouedad, kelaouennoù, kazetennoù.

Tro-spered al lodenn vras ag ar boblañs e vez anvet ar meno foran : savet e vez ar meno foran get sav-poentoù kaset get kedodediz àr ar goulennoù dre vras.

B. Penaos en em stumm ar meno foran ?

Depend a ra eus live anaouzegezh ar c'heodad àr un sujed roet. Rol ar mediaoù eo roiñ da bep keodedad titouroù sur ha liesseurt evit ma c'hellehe ar geodediz sevel o sav-poent poellek hag arguzennet. En tu kontrell, pa ne vez ket a ditouroù, ar meno foran a chom termenet àr ar gounnar, ar vrud hag a c'hellay bout daouornet. Levezon a ra ar mediaoù an doare ada soñjal

en ur ginnig an traoù hervez un tu pal dezhañ eo diskoez deomp un dra bennak. Ur galloud pouezus e vez get ar mediaoù.

C. Bevennoù ar frankiz disklêriñ e veno e vez reolenet get al lezennoù, hini ar 1 a viz Gouere 1881 àr frankiz kelaouiñ. Gwareziñ a ra ar geodediz enep d'an droukimplijoù (titouroù faos, mezhus, geveier, gwall vrudiñ...) pe gwalliñ ar vuhez prevez. Ar gazetennerien o deus kodoù, reolennoù dezhe, anvet **an dleoniezh** (reolennoù micherel) strollet e-barzh karta Municht 1970 èl doujiñ doc'h ar gwirionez, digenn ar frankiz kelaouiñ, embann nemet pa vez gouiet orin an titouroù

. La Charte de Munich (1970) pe Charte de déontologie de la presse régionale
Les devoirs essentiels du journaliste dans la recherche, la rédaction et le commentaire de l'information sont : 1. Respecter la vérité, quelles qu'en puissent être les conséquences pour lui-même. [...] 2. Défendre la liberté de l'information. [...] 3. Publier seulement les informations dont l'origine est connue. [...] 4. Ne pas user de méthodes déloyales pour obtenir des informations. [...] 5. S'obliger à respecter la vie privée des personnes. [...] 6. Rectifier toute information publiée qui se révèle inexacte. [...] 7. Garder le secret professionnel et ne pas divulguer la source d'informations confidentielles. 8. S'interdire le plagiat, la calomnie, la diffamation et les accusations sans fondement. [...] 9. Ne jamais confondre le métier de journaliste avec celui de publicitaire ou de propagandiste. [...] 10. Refuser toute pression. [...]

E Frañs ez eus ar **CSA, Conseil supérieur de l'audiovisuel**, krouet e 1989, a benn lakaat da zoujiñ doc'h reolennoù-mañ er chadennoù radio ha skinwel

III. Dañjerioù ar mediaoù :

A. Dañjerioù èl ar rouedadoù sokial (msn, facebook, skins party) : buhez prevez ebet, pep tra embannet, skignet.... Doujañs ebet doc'h ar vuhez prevez....

B. Hiziv-an-deiz re a ditouroù, keleier a be seurt, ne vez ket donaaet an titouroù, titouroù ne vez ket kaset da benn, mankout a ra da geodediz zo titouroù a-benn sevel o sav-poent personel. **An dreist-titouriñ a gas an distitouriñ.**

C. Daet eo an titourin da vout **ur produ kenwerzhel** : koustus eo ha mammenn eo. Pouez ar vruderezh a c'hell treuzfurmiñ kalite ar programmoù. Strollet eo hiziv e-barzh strolladoù arc'hant pe industriel bras èl Vivendi-Hachette Lagardere e Frañs pe Berlusconi e Italia. Levezonet eo ar mediaoù get lezennoù ar marc'had (lodenn an Audimat evit ar skinwel) hag e vezant muioc'h-mui stag doc'h ar vruderezh a-benn arc'hantiñ anezhe. Unvanaat ar mennozhioù hag ivez an distitouriñ a c'hell bout an dañjer evit mont en-dro ar frankiz hag ar c'heodedouriezh. 10. Refuser toute pression. [...]

D. Seblant a ra muioc'h-mui dedennet an dud get buhez prevez an dud vrudet « stars » evit an dielloù-film, ar c'heleier gwir. Diaesoc'h eo treuzveviñ evit ar reporterien-skeudennourien